



STEREDEN AR MOR

Ave, maris Stella!

Var don : *Kurunen aour ha perles an Itron Varia Remengol.*

Salud, stereden ar môr, patronès Breiz-Izel,
Salud, Guerc'hès Remengol, Guerc'hès teir guerc'h santel,
Salud, GUERC'HÈS REMED-OLL, Mam vad ar Vretonet!...
En env, er môr, en douar, gloar enor deoc'h bepret!...

Ia salud deoc'h, Guerc'hès, salud gant karantez,
Rouanès vras an Arvor, Rouanès an ælez,
C'hui p'hini er barados, gant an Dreindet o ren,
N'oc'h eus azioc'h ho trôn nemet Doue ebken.

O Guerc'hès muia karet, merc'h d'an Tad eternal,
Choaset 'vit Mam d'hor Zalver, arog dont da c'henel,
En despet fazi Adam c'hui zo bet concevet
En korf glân santes Anna, divlam eus ar pec'het.

'Vit sec'ha daëlou an dud pere oa o vouela,
En ho chadennoù pouner aboe pevar mil bloa,
C'hui oc'h eus douguet, nao mis, Jesus, Roue ar gloar
Evit p'hini oa re striz an env hag an douar.

Souezet demeus eur renq ker bras ha ken huel,
An oll dud zo bet ganet hag ar re da c'henel,
Deus al lec'h ma sao an heol, beteg al lec'h ma kuz,
Arog disken en ho bez, ho brudo evurus.

Guerc'hès, oc'h oll vugale, beteg heur ho maro,
A garo, a vinnigo, a veulo oc'h hano,
Rag bemde e Remengol, e roit da anaout
Eze ho madelezou ken bras hag ho kallout.

Piou a alfe niveri an oll madoberou,
Oc'h eus gred e Breiz-Izel, hag en kalz a vroiou.
Piou a alfe lavaret en deveus ho pedet,
Eb kaout, ervez he c'houlouen, ha raktal he requet!...

Difen a rit an ilis hag an hano kristen,
D'ar beorien noas affliget, e roit bepret souten,
Dre garantez e chomit en ilis Remengol,
Abaoue pemsek kant vloas, 'vit soulagi an oll.

Nag a dud clanv, forbuet, o deus bet ar c'herset,
Ped buguel paour, e langis o deus bet ar iec'het,
Nag a vammou ankeniet, nag a briejou kes,
Rentet seder ha laouen; benos d'ho madeles!

D'a eil eus a viz even, sadorn ar pardon bras (1),
En ilis sakr Remengol, kals tud a erruas;
Dindan ar glao, an avel, an tourmant ar goassa,
E teue pelerinet, laouen, en eur gana.

Ann aoutrou n'Escop kerkouls hag ar belerinet,
D'ar sadorn, e Remengol a zo enem gavet;
Gant joa vras en deus guelel, en desped d'an amzer,
E oa leun, evel bep bloa, ilis mam hor Zalver.

- ◁ Kenavo, Guerc'hes santel, da vloa e teufomp c'hoas.
- ▷ D'ho kuelel evel hirio, devez ho pardon bras;
- ▷ Kenavo, ha pa deuio hon tud kes, var ho c'his,
- ▷ Gant peb a c'houlouen goar e teufomp d'oc'h ilis.
- ▷ Enem strinkomp d'an daoulin, ni oll tud a c'hilac'har,
- ▷ Dirag ar vrassa Santez a zo var an douar,
- ▷ Evit ma plijo gant-hi rei deomp evit mennat,
- ▷ Eur vuez hir hag euruz, feiz kren, eur maro mad.
- ▷ Distroomp brema d'ar gêr gant peb a vedalen,
- ▷ Evit rei d'hor bugale, ha d'hon tud da zougen,
- ▷ Dre hon tad santel ar Pab eo indulganciet,
- ▷ Ha var kalon peb kristen e tle beza douguet.

Evelse e kimiade teir vreg paour diarc'hen,
Deut da bardon Remengol, gant ho guialen ven;
Deut mintin mad eus ar gêr da zadorn an Dreindet,
Gant eun niver bras a dud hag a belerinet.

(1) Er bloavez 1860, enn niver bras a vatimanchou a zo enem
gollet, tud ha madou, e pad ar goal amzer a zo bet er bloavez-ze.
Kals ive o deus saveteet ho bue hag ho batimanchou an eur bed
e galon, an itron Varia Remengol.

Goude beza gret teir dro d'ilis Mam Breiz-Izel,
 Bea poket d'an ôter, ha d'an imaj santel,
 O deus kemeret ho hent, laouën, en eur gana
 Ar gwersiou kaër a zo grêd d'an Itron Varia.

Pa oant o vont da dremen dreist eur mene huel,
 E parrès Landevennek, dirak tour Plougastel,
 Unan eus an teir vreg-ma en he za a chomas,
 Ha d'he diou gamaradès, kerkent e lavaras :

Sellet-'ta eus an amzer ; an oabr a deu teval,
 Doue ! pebeus tarz kurun !!!.. klevit-an o strakal,
 Spountus varlerc'h al luc'hed dre volz an env huel,
 Evit gervel an arne p'hini zo o sevel.

Ar glao a goe dre varrad, an avel o iudal,
 A lak ar gouez da blega hag ar môr da c'hrozal ;
 Doue ra viro e ve eul lestr benag brema,
 Dindan eun amzer ken rust e rankfe perissa...

Guelet a ran dirak Brest, siouas e kreis ar rad,
 Eul lestik paour bransellet, o trei hag o lampad ;
 Kannet gant an avel foll ha gant ann tolliou môr,
 Evit hen lonka a bès, ann abîm zo digor.

Ar gouelion zo diframmet, torret eo ar vern vras
 ha drastet barren ar stur : var al lestr ze, siouas !
 E zeus goasset, bugale, gragez, prest da veuzi ;
 Guerc'hès vad ho zikourit e maint oc'h ho pedi.

En oabr, e kreis an toarmant, e veler o tarza,
 Eur skerijen luguernus pehini a vrassa....
 D'an daoulin, mignonet kes, ne daïmp ket da goll,
 Setu, aman, dirazomp, Guerc'hès sakr Remengol....

Guelet a ran he zaë gaër, e mezer arc'hantel,
 He mantel aour hag he goal glaz, ha steredennet,
 En aour glân, hag e perlez, e ma he c'hurunen,
 Eur c'helc'h skeudus 'vel an heol, a zo en dro d'he fen....

Pellaat a ra ar c'houmoul, ar glao a zo lavet,
 Dirak Guerc'hès Remengol, an avel zo pleget
 Siou! eo, brema ar môr, siou! ar c'hurunou....
 An dud paour var ho lestrig a gân meulodiou....

Bennos, bennos, deoc'h, Mari, Mam vad tud an Arvor !..
 C'hui a zo en guirione stereden gaër ar môr ;
 Plijit kenderc'kel bepriet da zelaou hor peden,
 Hor fizianç, goude Doue, a zo ennoc'h ebken.

Erronout a ra en ôd al lestr' saveteet,
 He hano, *Mari-Anna*, a zo varn'han skrivet ;
 Etre ar vartolodet hag ar bassajourien,
 E zeus gant ar vugale, *deg a tri-ugent den*.

Goude ma oant en douar, dre virakl diskennet,
Enem lakont diarc'hen hag en korf ho rochet,
Ha raktal da Remengol e ieont en eur gana
En eur gana da Vari : *Ave Maris stella !*

Pa oant o vont en Ilis gant guir devotion
E oa ar c'hleier o son 'vit ar brocession ;
Goude bea daoulinet, e zint enem laket,
An daëlou n'ho daoulagat, 'mesk ar belerinet.

E dorn pep hini ané e zeus eur c'houlouen,
Ha medalen Remengol a vrill en ho c'herc'hen
Evit renta testeni da dud an oll vroïou,
E ve da gement hini he doug, gréd miraklou.

N'en dé ket hennès ebken ar burzud e deus gréd,
Devez pardon Remengol, ar Verc'hès biniguet,
Ne alfen ket ho skriva ma ve red din heaven,
Kement mirakl en deiz-ze, zo gred en Breiz-Izel.

Anaoudegez a roin deus lod, en komzou ber :
Peder vreg oc'h antreal er rivier a Gemper,
O deus guelet ho bagig o vont dindan ann dour,
Mes Patronès Remengol a zo deut d'ho zikour!..

Eul lestr' bian diskaret dre eun tól avel foll,
Er rad, tost da Lannion, a zo deut d'ennem goll,
Ar pevar den oa en'han, gand galloud ar Verc'hes,
O deus bet, dre eur mirakl, amzer da vont er mes.

Lestr' paour ar c'habiten Traon demeus a Eaez-Vaz,
Var eur garrek e Bro-Zos, zo bet kollet, siouus!...
Mes an oll vartolodet, kouls hag ar c'habiten,
A zo deut iac'h d'an douar, bennos d'ho medalen.

Dindan ho protection ni'ennem laka oll.
Mam vad an dud ezomek, Guerc'hès sakr Remengol !
Diouallit ho pugale hag en de hag en nos,
Plijit, goude ho maro, o c'has d'ar barados.

Mar teu arne da zével hag avel da iudal,
Mar teu ar glao da goea hag ar môr da grozal,
Diskennit c'hoas var an oabl, da gass an arne pell,
Ha da viret enep droug hor bro gaër Breiz-Izel.

Tadon, mamou, bugale, deut gant devotion,
Da bedi evit ho tud a zo var ar môr dôn,
Deut da ilis Remengol, ILIS AN OLL REMED,
Hag e velfot ho tud kes, er ger deoc'h c'hoas rentet.

Kenniget gant J.-P.-M. AR SKOUR, kloarek ha Barz Itron Varia
Remengol, d'he vignon ker, an Aoutrou G. MILIN, Barz laouenan
Breiz.

Lannion, impr. Le Goffic.